




ITRON VARIA LAMBADER

Péd ha péd chapel evel houmañ ne gaver ket, e Breiz en enor d'ar Werhez.

BLEUN-BRUG

kenstrivadegou 1958

Niv. 105 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

DU 1957

Règlement de nos Concours

Les Concours scolaires du Bleun-Brug comportent : lecture bretonne, récitation, chant, narration et dessin.

Le classement se fait par matière et par âge (Petits : 5, 6, 7, 8 ans — Moyens : 9, 10, 11 ans — Grands : 12, 13, 14, 15 ans). Il est possible de concourir en une matière seulement ou en plusieurs matières. Dans ce dernier cas on peut gagner plusieurs prix. Ces prix seront des objets d'art ou des livres en breton et en français sur la Bretagne. L'année dernière il a été donné pour plus de 300.000 francs de prix.

1. — **LENN** (lecture) : Les élèves auront à lire dans le livre en usage dans leur école : Le Breton par l'Image, Yez hon Tadou, Me a zesk brezoneg, Komzom (D^r Tricoire), Deskom brezoneg, Le Bozec.

2. — **DISPLEGA** (récitation) : Chaque concurrent déclamera par cœur la récitation de sa catégorie que l'on trouvera ci-après. Cette récitation devra être vivante et mimée autant que possible. L'accent et les tournures du terroir ne sont pas à éviter.

3. — **KAN** (chant) : Chaque concurrent individuel donnera deux chants : 1°) Le chant de sa catégorie à prendre dans ce recueil ; 2°) Le jury désignera, dans la liste qui suit un cantique dont le concurrent devra chanter 1 ou 2 couplets en se servant de son recueil. (Les airs des six cantiques devront donc être sus, sauf pour les petits qui se contenteront des deux premiers.)

CANTIQUES A APPRENDRE : 1. *Jezuz pegen braz ve* (dans le recueil diocésain de Quimper, n° 34) ; 2. *O Kalon Zakr, Kalon Jezuz*, n° 47 ; 3. *Kinnigomp holl ar Zakrifis*, n° 58 ; 4. *Doze, gwir bried*, n° 41 ; 5. *Piou 'lavar pebez glabar*, n° 97 ; 6. *Mari, gwir Vamm da Zoue*, n° 59.

En chant, on peut aussi concourir en groupe ; dans ce cas, il n'y aura qu'un seul classement ; on peut donc mêler les âges. Il sera également demandé aux groupes l'un des chants de ce recueil, et un cantique. — Des enfants ayant chanté en groupe, peuvent encore concourir individuellement.

4. — **SKRIVA** (narration) : eur veillhadeg : Racontez une veillée que vous avez vue chez vous (une page et demie de cahier, environ).

5. — **TRESEREZ** (dessin) : Sur une feuille de dessin 24×31, illustrez l'une des chansons de ce recueil.

Narrations et dessins devront parvenir 15 jours avant chaque Bleun-Brug, à : V. Séité, Bleun-Brug, Châteaulin (pour le Finistère).

Le Bleun-Brug de **Cornouaille** aura lieu à **Pont-l'Abbé**.

Le Bleun-Brug du **Léon** à **St-Thégonnec**.

Il y aura des éliminatoires à **St-Renan, Plouguerneau** et **Cléder** pour le **Léon**. — Le **Trégor** et le **Morbihan** auront également leur Bleun-Brug.

Lakit ho pugale da gonkouri er Bleun-Brug

Koumananti da « Bleun-Brug » : koumanant a enor : 600 lur — madoberour : 1000 lur : Bleun-Brug, 21, rue Joseph Doury, Nantes. - C.C.P. 1541.90 Nantes.

133854



— 1 —

dalhom sonj

Evid an naved, pe an degved gwech, oun bet, epad an hañv diweza, oh ober eun droidad, dre beredou ar zoudarded, maro er brezel 14.

Mond a ra atao bihan ar galon, dirag ar parkadou kroaziou-ze, fichet, d'ar mare-mañ, gand bodennou roz ruz, o soñjal e kemend a dud, falhet e bleun o yaouankiz, evid gounid, vel ma lavared neuze, frankiz ha peoh d'ar bed.

Nag emaoñ pell diouz ar mennad-se !!!

En eur lenn, ker stank, anoñv euz or bro Arvor, ez eus deuet soñj din euz Yann Calloc'h.

1957 eo, evid gwir, an 40^{ved} bloaz, abaoe m'eo kouezet du-hont, e Urvillers, e-barz ar Somm, tizet en e benn, gand eur vouled kanol... Yann Calloc'h, ar haera euz bugale Breiz, ar barz saoudard, e-neus skrivet ar homzou kaerra, bet skrivet, epad ar brezel :

« Ene Kornag, he douar, he merhed hag he bleun
Oñ gened ar bed, en noz-mañ, a viran...
Me zo ar Gedour braz war zao evid ar vro...
War harzou ar reter, me zo eur garreg vretan... »

Ano ha spered Calloc'h a zo evidom-ni, amañ, er Bleun Brug, eur banniel, a gaver skrivet warni, e lizerennou aour, on daou hér-stur : Feiz ha Breiz.

Anaoud Calloc'h a zo tomm a halon ouz an daou deñzor-ze, o deus leuniet e vuhez hag e gaset, ken seder, d'ar maro...

« Me, emezañ, a vezo bet an hini a gan, en noz, evid startaad e vreudeur... »

E vreudeur ! Pegen pell goude e varo, e kendalho, dre e skridou, d'o gervel, d'o zacha, d'o dibrada, er-mêz euz o buhez gorreg ha klouar, evid kregi el labour, en ero, digoret gantañ.

O ! gouzoud a ree n'oa ket eul labour êz, rag goude beza ana-vezet :

« Ar brezel a ra vad d'ar Vretoned. E-leh kaoud mez euz o ouenn, bremañ e savont uhel o 'fenn, bremañ e ouzont pegen kaer eo an ano a Vreizad... » e lake da darza, euz e galon, ar bedenn virvidig-mañ :

« O va Doue, deskit din ar gériou a zihun eur bobl. Ha mond a rin, kannad a oanag, d'o adlavared d'am Breiziz kousket... »

Ma vije bet chomet beo, Calloc'h en defe bet bremañ 69 bloaz... Gand ar galon dan a oa, en e greiz, klaskom sonjal pebez brall ha pebez lañs en defe roet d'an Emzao breizeg !

Menoziou dounna e spered a jom ganeom, da vihana ! O pleustri warno, oh en em vaga anezo, eo e welim an hent, hag e kavim nerz da vale warnañ, dorn ha dorn, heb fallgaloni.

L. B.

Kenstrivadeg ar han

(Concours de chant)

Re vihan (petits), 5, 6, 7 et 8 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

AL LABOUSIG BIHAN

Allegretto

Al la-bou. sig bi-han e-neus des-kei ni-jal, Al la-bou.
sig bi-han e-neus des-kei ni-jal. E-neus des-kei la vio-
lett' E-neus des-kei la vio-lett' E-neus des-kei ni-jal.

1. Al labousig bihan, e-neus desket nijal. (bis)
E-neus desket, la violett. (bis)
E-neus desket nijal.
2. Diwar eur skourr sapin e-neus desket nijal. (bis)
E-neus desket, la violett. (bis)
E-neus desket nijal.
3. Ar skourr a oa tener, al labous 'zo kouezet. (bis)
Al labous 'zo, la violett. (bis)
Al labous 'zo kouezet.
4. Lavar din labousig, e-pleh ez out gloazet. (bis)
E pleh ez out, la violett. (bis)
E pleh ez out gloazet.
5. Torret am-eus va garr, ha pleget va askell. (bis)
Ha pleget va, la violett. (bis)
Ha pleget va askell.
6. Lavar din labousig, peur e vezi para. (bis)
Peur e vezi, la violett. (bis)
Peur e vezi para.
7. Biviken mui moarvad, me ne vezin pare. (bis)
Me ne vezin, la violett. (bis)
Me ne vezin pare.
8. E harr a zo breinet, al labous 'zo maro. (bis)
Al labous 'zo, la violett. (bis)
Al labous 'zo maro.

Paotr Treoure.

(Eur zon goz 'euz goueled Leon.)
Diwar Soniou Feiz ha Breiz.

Mots difficiles. — **Eur skourr** : une branche. — **Gloazet** (glazet) : blessé. —
Peur (pe vare) : quand. — **Biviken** (biken, morse) : jamais.

Re grenn (moyens), 9, 10, 11 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

AR HAZ KOAD (1)

Alerte.

1. Di-sul o va-le dre ar hoad, i-ri dei tou la-ri den, o se-
tu ma ta-pis eur haz-koad, i-tou, i-tou, i-tra la-la, i-ri-dei-tou la-ri-den, o
2. Pa oe ta-pet, ta-pet e oa La-ker er zo-lier da lar-da, la-ri-tou-ri
tei, gé, la-ri-tou la la, hop, hop, hop! La-ker er zo-lier da lar-da

3. Laket da larda gand mesper,
Iri dei tou, lariden, o !
Ha krampoez viou bep gwener
Itou, itou, itra la, la, la.
Iri dei-tou, lariden, o !
4. Pa oa lardet ha lardet mad,
Deut ar higer da labourad, Laritou... (Comme le 2^e couplet)
5. Med ar haz-koad ouz e weled, Iri dei...
Beteg an doenn e-neus lammet. Itou... (Comme le 1^{er})
6. Lammet e-neus beteg an doenn,
Hag ouz an treust faoutet e benn. Laritou...
7. Setu-eñ kouezet maro-mik, Iri dei...
Lakeet da boazad er billig. Itou...
8. Ha pa oe savet ar golo,
Pegen mad eo blaz ar friko, Laritou...
9. E-pad eur miz, lein ha merenn, Iri dei...
Friko kaz koad ha chistr melen. Itou...
10. An tad, ar vamm, ar vugale,
A lip o beg gantañ bemde. Laritou...

Diwar yez Gwened.

Mots difficiles. — **Er zolier** : au grenier. — **Mesper** : des nêles. — **Merenn**
(mern) : dîner.

(1) Apprenez-le d'abord lentement comme si les crochets étaient des noires,
puis, une fois su, à l'allure normale.

Re vraz (grands), 12, 13, 14 et 15 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

WAR VORDIG AN DOUR

Mouvement de complainte, avec émotion.



1. En deiz all o pourmen e oan bet,
War vordig an enezenn,
War vordig an enezenn.
Eur plahig koant am-oa gwelet,
War vordig an enezenn.
Eur plahig koant am oa gwelet,
War vordig an dour.
2. Me yeas d'he haoud en eur grena,
War vordig an enezenn. (bis)
O weled 'nezi o ouela,
War vordig an enezenn.
O weled 'nezi o ouela,
War vordig an dour.
3. O emezi. me zo glaharet,
War vordig an enezenn. (bis)
Va mignon ouzin 'zo fachel,
War vordig an enezenn.
Va mignon ouzin 'zo fachel,
War vordig an dour.
4. Va mignon a garan kemend all,
War vordig an enezenn. (bis)
Siwaz ! a zo eet gand eun all,
War vordig an enezenn.
Siwaz ! a zo eet gand eun all,
War vordig an dour.

Dastumet gand M. Aodig,
ha tennet diwar levrig an YKAM.

Bugale, deskit brezoneg !

Suivez nos cours de breton par correspondance.

Ecrire à : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

Kenstrivadeg an displega

(Concours de Récitation)

Re vihan (petits), 5, 6, 7, 8 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

EURED AL LAOUEANIG

1. Eur vandenn vraz a laboused,
Eun deiz a oa en em vodet,
Evid eured al laouenan,
Al labousig bihan-bihan.
2. An drask a lavar da genta :
Me a yelo en eur gana
Da eured al laouenanig
Al labousig ker bihanig.
3. Ha me ive 'me an eostig
Hag a gano meur a zonig
Evid eured al laouenan,
Al labousig bihan-bihan.
4. Me yelo ive 'me 'r goukoug,
Gand seiz taboulin ouz va foug,
Da eured al laouenanig,
Al labousig ker bihanig.
5. Ha me ive 'me 'n durzunel,
Hag a zañso en eur skudell,
Evid eured al laouenan,
Al labousig bihan-bihan.
6. Me yelo ive, 'me ar big,
Hag a gaso eun tamm kig,
Da eured al laouenanig
Al labousig ker bihanig.
7. Ha me ive 'me ar sparfell,
Gand fars dindan va diwaskell,
Evid eured al laouenan,
Al labousig bihan-bihan.
8. Hag a-raog 'n em zispartia,
Ni a youho en eur gana :
« Buhez hir d'al laouenanig,
« Al labousig ker bihanig ».

Hervez,

« Le Courrier du Finistère ».

Mots difficiles. — **Laouenan**, laouenanig : roitelet. — **An drask** : la grive. —
An eostig : le rossignol. — **Taboulin** : tambour. — **An durzunel** : la tour-
terelle. — **Ar sparfell** : l'épervier. — **Skudell** : écuelle.

Re greñn (moyens), 9, 10, 11 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

AR YARIG HE VIOU AOUR

1. — An dén piz,
Aliez 'zo kriz.
O klask gwellaad e stal, petra 'ra ?
Kas e stalig da netra.
2. Setu petra 'c'hoarvezas
Gand Fanch Vraz,
N'eus ket keit-se c'hoaz.
3. Bez' e-noa en e benn-ti,
Eur yarig vraz pluñv gwenn dezi,
A zofe bemdez, va zud keiz,
Eur vilg aour, koant 'vel an deiz.
4. Ne lavar grik da zén,
Gand aon zofe ket kén.
Ha bemdez kreske ar bern aour,
E ti va Fanchig paour.
5. Eun devez, ar paour-kéz,
A zoñjas evel-henn :
— « Va dén mad, te 'zo fêz,
« Gand c'hoant gouzoud penn da benn
« An teñzor 'zo moarvad,
« E kov da yarig vad.
« Gra outi 'ta he stal
« Ma weli petra dal ».
6. Ha kerkent Fanch a lar :
— « Gut ! gut ! gut ! va yar ! »
Kregi 'ra en e yar wenn.
'N eun taol kontel 'troh he 'fenn,
Ha gand eun all e tigor krenn
Kov ar yarig wenn.
7. Méd siwaz !
E boan a gollas,
Hag e yar c'hoaz ouspenn !
Ne gavas enni tra ebéd !
Neméd eur hovad bouéd !
8. E peb amzer 'ya tud da baour
Klañv ma vezont gand an aour.
Gwelloh eo fumez leiz an dorn,
Eged aour melen leiz ar 'forn.

Yann Gorrigan.

Mots difficiles. — **Dozvi, dofi, doï** : poudre. — **A zofe** (a zove) : qui pondait. — **Ne lavar grik** : ne dit rien. — **Te 'zo fêz** : te 'zo skuiz : tu es fatigué. — **An teñzor** : le trésor. — **A lar** (a lavar) : dit. — **Furnez** : sagesse.

Re vraz (grands), 12, 13, 14-15 ans.
Paotred ha merhed (garçons et filles).

AR HEMENER HAG AN DIAOUL

1. — Eur wech, eur hemener a
drohas e yun en eur
zebri prun a-raog
kreisteiz. An diaoul
a oa warnañ raktal.
2. — Ahanta ! kemener, eme-
zañ, setu me digoue-
zet.
— Ya sur, eme ar hemener,
spontet. Petra 'zo a
nevez, da vihanha ?
— Me 'zo deuet da gerhad
ahanout.
— D'am herhad ? mez pe-
tra ?... Perag ?...
— Perag ?... Dizoñj out 'ta,
kemener ; Alo ! em
zah ha buan...
Hag evel en eur hoari e
pakas ar hemener en
e zah ivern.
3. — Neuze e klevas, en eur
park, eur plah yaou-
ank o peli war he
zaout.
— Klev 'ta, emezañ, honhont he-deus c'hoant ive da zond d'an ivern
evid doare !
Hag an diaoul lezel e zah ha da gerhad ar plah yaouank.
4. — E keid-se, ar hemener a ruihe gand e zah euz an eil kleuz d'egile.
Eur chaseour a erruas da dremen.
— Petra 'n diaoul a zo aze da vihanha, emezañ ?
Hag e roas dezaf eun taol botez.
5. — Aïou ! Aïou ! eme ar hemener !
— Petra ? Piou 'zo aze ?
— Me, paourkêz aotrou, o vond gand an diaoul d'an ivern !
— Gand an diaoul 'ta !
— Ya 'ta ! eme ar hemener, hag an dra-ze, ablamour ma 'm-eus
drebet diou brunenn a-raog kreisteiz.
6. — O ! gortoz, eme ar chaseour.
Hag e tilasas ar zah.
Ar hemener ne jomas ket da vragal...
Ar chaseour, neuze, a halvas e gi Turk, eur pikol ki braz, hag
e lakeas anezañ er zah e plas ar hemener, ha kuit ive.
7. — Koulskoude, an diaoul e-noa greet tro wenn evid e blah yaouank,
rag houmañ he-doa goulennet pardon.



Dond a reas war e hiz, hag en eur lakaad war e gein e zah, e lavar :

— N'am eus ket kollet va devez. Va hemener am-bo atao !

8. — Ar hi, avad, a 'fringe en e zah. Yudal a ree. Regi a ree gand e ivinou kein an diaoul kèz ha zokén, kregi en e 'feskennou gand e zent.

9. — Digouezet en ivern, Lusifer goz a lavaras dezañ :

— Ahanta ! deuet out a-benn ar fin ? Petra 'zo ganéz ?

— Eur hemener.

— Eun all c'hoaz ? Mad, dilas ar zah.

10. — Méd a-veh ma oe digoret ar zah, ar hi, fuloret oll, a lammas war hemañ, war henhont, war gement diaoul en em gave gantañ. Eüruz e oa an diaoulou da gaoud diwaskell. Nijal o doa renket war dreustou an ivern.

11. — Ha gand o 'forhoù houarn, o-doa gellet, heb diskenn, digeri an nor. Ar hi a lammas kerkent er-mêz.

Hag an diaoulou en em glevas diwar neuze, da jom heb digas mui kemener ebéd kén d'an ivern.

Hervez K. Jezegou.

(Diwar Korn an Oaled.)

Bugale, deskit, lennit ha kanit brezoneg.



Evel Bagad al Likès, deskit seni biniou ha bombard.

skol-hañv ar Bleun-Brug el Likès, kemper

Setu on trede skol-hañv : Rosko e 1947 ; Kastell e 1956 ; Kemper e 1957.

Savet e oa evid ar vistri hag ar mestrezed-skol. 700 lizer pe lizer-kelh, pennadou er helouennou hag er journaliou, o-deus kaset, a-raog, ar galv da oll skoliou kristen Breiz-Izel.

Klevet eo bet ar hloh-galv. 103 a dud en em gavas el Likez Kemper, d'an 2 a viz Gwengolo, goude koan, evid prezegenn zigor ar skol-hañv.

Bez ez oa eno 41 frer euz frered Ploermel, La Salle, ha Sant-Gabriel ; 25 seur euz seurezed Kermaria, Sant-Meven hag ar Spered-Santel ; 44 beleg euz eskoptiou Kemper ha Gwened, ha 26 sivil (gwazed ha merhed).

✱

An aotrou Fave, Vikel-Vraz eo a roio brall d'ar skol-hañv dirag an aotrou Cadiou, Vikel-Vraz hag an ao. Bihan, Enselloùr skoliou Frered Ploermel.

Lavared a ra ar vad he-deus an Iliz greet d'ar brezoneg, en eur ober anezañ he beñveg a abostolerez e Breiz-Izel. An Iliz n'ema ket en he 'fal savetei yéz na « kultur » ebéd. Kristen ebéd, avad, ne dle chom dizeblant dirag herez sevenadurel eur boblad tud pe vihan pe vraz e ve koumañ. Laza eur yéz, laza eur zevenadurez a zo paourraad an denelez an he 'téz. Rei anaoudegez ha lorch d'eur boblad tud euz herez sakr he zadou a zo he 'finvidikaad, he dibrada uheloh, rei dezi muioh a halloud da veza muioh dén, ha dre-ze muioh kristen. Pegen trist n'eo ket ar véz a ziskouez kalz re a Vretoned ouz ar pezh a zeu dezo a-berz o zadou. Tud laosk eo ar re-ze, didalvez aliez, prest da drei kein da heb tra ; tud izelleet... Eul labour kristen eo adsevel an dud-se. Setu end-eeün ar pezh a 'fell deom studia e-doug ar skol-hañv-mañ.

✱

Beb mintin e vézo eur brederiadenn gand an ao. Falc'hun, war buez sant Erwan. Peb hini a hell tenna ahano, kenteliou a zantelez talvouduz braz. Evid skei muioh on eneou, e lakaio da gomz an testou o-deus bevet ha poaniet gand ar zant.

Beb mintin ha beb noz ive e vez kanet ar pedennou e brezoneg. Nousped hini o-deus anzavet beza bet skoet gand kement-se.

An overenn a dregernó gand or hanou santel dindan renadur ar frer Mazé euz al Likès. Lennaduriou an overenn a vo greet gand ar frer Korantin Riou.

Da 9 eur ha kart e krog al labour bemdez. D'an devez kenta, Visant Seite a zispleg al labour bet greet gantañ war dachenn skoliou Kemper ha Leon, e-doug ar bloaz-skol tremenet. War-dro 120 skol gwelet ; 120 kaozeadenn a 1 eur hanter greet... Komz a reas ive euz kenstrivadegou ar B. B. : 246 kenstriver e Lokronan ; ouspenn 500 e Lanniliz. Deuet eo ar mare da zigreizenna ar honkourioù, da vihanha e Leon. O zevel dre gantonioù evid dibab ar re wella da vond d'ar Bleun-Brug, a zo eun dra da ober e 1958. E Leon ez eur en em glevet da gaoud dija teir « eliminator » : Lokournan-Leon, Plougerne ha Kleder... Evid echui, Visant Seite a ro da glevet war ar magnetofon kanaouennou bugale, dastumet gantañ er skolioù.

✱

Da zég-eur e vo bemdez tro an *ao. Falc'hun*. Gand mall e vez atao gortozet ar prezegennou-mañ. Diskouez a ra penaoz, ar gudenñ sevenadurel a zo hirio eur gudenñ hag a zell ouz ar béd a-bez. Dre ar béd oll ema hirio ar sperejou o virvi gand ar prederiou-se. O tivenn herez on tadou, yez on tadou, n'om ket eta tud diwar-lerh, méd tud hag a zo gand réd ar béd a vremañ, tud hag a zo o zell dreist harzou o bro. Dre studia kudennoù or Bro vihan, e komprenim gwelloc'h kudennoù ar broiou all hag e vezo digoroh a-ze or spered war ezommou ha gwirioù ar re all. An implij diou yez, klasket ha miret, a dle ober ahanom tud gouestoh.

Anavezet mad eo an *ao. Duigou* gand tud ar Bleun-Brug. Ped kwech dija n'ôn-eus ket e glevet da geñver or gouelioù, on devezioù studi, or skolioù-hañv. Merzet on-eus abaoe pell 'zo an dalvoudegez a zo ennañ.

Ar brezegenn a ra hirio da 11 eur, a zo evel eun astenn d'an hini a reas warlene e Kastell-Paol.

Daoust, emezañ, hag eur Vro Vihan, evel Breiz, a hell hirio an deiz divenn he zevenadurez ha beza « modern » er memez amzer ? Ya ha ya ! emezañ. Ne welit ket pegen randonenn, pegen divlaz e teu ar béd da veza p'ema an oll vroioù o klask en em dreveza ? Emeur o tond da veza skuiz gand kement-se, ha setu perag kemend a virvilh dre oll. Dirag galloud spontuz ar mekanikou, e vo klasket adrei da beb broad he fersonelez evid ma vo kaeroh ar bed warhoaz. Da biou ober al labour-se e Breiz ? D'ar Bleun-Brug, d'ar helhiou, d'ar Bagadou, d'al lazou-kana... a gavom dija ken niveruz en-dro deom. Deom-ni d'o hentelia, d'o skora da rei lañs dezo, ma vezint an « transformateur » ar greizenn a vuez breizeg, a skigno ar vuez tro-dro dezo er parrezioù, ar vuez a vo enni levenez gwirion, lorch ha nerz, ar vuez a lakaio bara war an daol ha bleunioù en-dro d'an ti... »

Da greisteiz hanter eo laouen ar pred. Diskouez a ra pegen mad eo bet boulhed ar skol-hañv.

N'eus ket amzer da goll. Da ziw eur hanter, peb hini en em gav adarre war an dachenn labour da zelaou *Reunan ar Mough*.

Reunan ar Mough a zo eur skrivanier hag e-neus eur bluenn gaer. Gounezet e-neus bet warlene ar priz braz a lennegez vrezonég da geñver gouelioù Kemper. Ouspenn, ginidig eo euz Gouezeg. An dibab a zo mad, pa deu da gomz euz *Jakez Riou* e genvroad.

Jakez Riou ? moarvad or gwella skrivanier. Daoust m'eo bet falhet abred gand an ankou, e-neus lezet eun eostad mad a skridoù : « Lizer an hini maro », « Ar Gorzeddig digor », « An Ti Satanazed » ha dreist-oll « *Geotenn ar Werhez* » ha « *Nomenoe oe* ». Euz an diou oberenn ziwezamañ eo e komzo, dreist-oll, ar prezeger. Lothey-Landremel, bro Jakez Riou eo en em zispleg penn-da-benn, a-hed pajennadoù fetis « *Geotenn ar Werhez* » : eur vro gaer, enni eur vuez rust, garo, kriz a-wechou, « *Nomenoe oe* » eo is'or ar foeter-hent. Jakez Riou e-unan o redez an amzer dremenet ; ar foeter hent a gar e vro ; n'eo ket komprenet avad gand o dud ne reont forz gand netra nemed gand ar gounid arhant. Daoust da-ze mond a ra gand e hent laouen ha leun a 'fent. Ar Vreiz a wel n'eo ket an hini he-deus harzou douar. En e spered hag en e galon eo ema ar Vreiz-se, Breiz nevez.

Goude prezegenn Reunan ar Mough pep hini a hello mond da wela-cenni ar mirdi, pe da bourmen dre gêr Kemper.

Da 6 eur ha kart, an oll a zo bodet adarre. Eun tammig kerse a zo, o veza ne vo ket ar prezeger war al lèh o tisplega e bennad. Evid mad e yehed e-neus renket, an *ao. Mocaer*, chom pell diouzm. An aotrou Falc'hun eo a lenno e brezegenn, diwar-benn ar geleennadurez diou yezeg e Bro-Gembre. Pell-pell emaoñ warlerh or breudeur Tramor. Du-hont, an diou yez, ar hembraeg hag ar saozneg, o-deus, ken braoig ha tra, o 'flas er skol, ha dén n'en em gav diésoh. Ar hontrol eo. Prometet e-neus or gouarnamant mond d'ober eun droiad du-hont da weled penaoz gwellaad stad ar brezoneg e skolioù Breiz. Ne ziskouez ket beza gwall breset da vond. Aon moarvad da baka re a gerseennou.

Goude koan e vo lennet « *Buez ar Zent* » an aotrou Perrot ha kanet ar pedennou diouz an noz.

Warlerh e vo eun abadennad sinema, gand an aotrou Legrand, tenner poltrejou euz Kemper. Filmou kaer kenañ, tennet an darn vuia anezo gand an *ao. Legrand* e unan, a zo eun drugar da weled : Gouelioù Kerne, Troveni Lokronan, Bleun-Brug Landi, Bleun-Brug Pont-e-Kroaz. Leiz on daoulagad a gaerder on-nevezo, pa 'z aim da glask or gweloc'h.

Eil devez.

Da 9 eur hanter e kroger adarre. D'ar Frer Korantin hirio digeri an abadenn.

Eur gentel efeduz ha leun a skiant-prena eo a ro deom, war an doare da zigeri ar hentelioù brezoneg en eur skol. Rei da houzaou, da genta d'ar vugale, petra eo ar brezoneg e-keñver yezou all ar béd. Diskouez dezo talvoudegez ar yez drezi he-unan, talvoudegez ar yez evito, evid an ekzaminou ; eun alhwez eo da rei da gompren an anioù a zougont, a zoug o hêrioù, o douarou... Gand ar brezoneg emaint, e gwirionez er gêr. Heb ar brezoneg ez int estrañjourien en o bro henidig... Goude e kroger da lenn ar yez. N'eo ket diéz. Eun tamm gramadeg da heul. Skriva ive. O lakaad end-eeun da zevel pennadoù o-unan, heb teuler re a gont ouz an doare skriva... Darn a hello sevel danevelloù souezuz, en tu-all d'ar pezh a vije bet gelllet kredi...

Méd deuet eo an eur da rei ar plas d'eun all, ahendall e vijed bet cho-met beteg kreisteiz, hep skuiza da zelaou Korantin.

An Doktor Tricoire eo a gemer e blas. Anavezet eo dija an D^r Tricoire, eur Vandead desket gantañ ar brezoneg. Kelenn a ra ar brezoneg d'e vugale, ha diwar frouez e skiant prena e-neus savet eul levrig-deski brezoneg, a zo implijet dija e meur a skol. An D^r Tricoire, moarvad, eo an hini a anavez ar gwella rann-yezou Breiz-Izel. Heb kuitaad e glañvdi, e Châteaubriant, e hell klevéd, gand e glañvourien an oll doareoù distaga gerioù a heller klevéd war or mézioù. Pa skriv e « *Bleun-Brug* », evid beza sur e vo komprenet dre oll, e lenn e bennadoù da Leoniz, Kerneviz ha Tregeriz. Brezoneg beo, ha nann brezoneg « chimik » eo a zeu eta gand an D^r Tricoire.

Euz kement-se oll e komz deom an D^r Tricoire, med klask a raio, dreist-oll, rei d'ar gelennerien a zo dirazañ, c'hoant da zigeri kentelioù brezoneg en o skol. War zigarez prepari ar vugale da dremen konkourioù ar Bleun-Brug, e heller deski dezo eun tamm brao a vrezonég. Perag ive ne glaskfe ket peb mestr ha mestrez, kemer bemdez, e-pas 5 munutenn ar 5 pe 6 wella euz bugale o hlas, evid deski dezo brezoneg. Ma rafe pep skol kemend-all, gwelit peb a vugale on-nefe, a-benn deg vloaz amañ, o houzaou lenn ha skriva brezoneg. Danvez lennerien d'or helaouennou ha danvez skrivagnerien ive.

Ra vo kalz a vistri hag a vestrezed, o heulia alioù fur an D^r Tricoire, evid mad or yez.

Ar chañs on-eus da gaoud pemp beleg euz eskopti Gwened en on touez. Goulennet on-eus digand unan anezo, an Aotrou *Brazideg*, rener-skol e Ploerdui, prezanti deom « *Dasson ur Galon* » levr kaer Loeiz Herrieu renket gand kement a zoujañs hag a garantez, gand e vab beleg, Meriadeg, kelenner e Pondi. Ar blijadur on-eus ive, d'her haoud en on touez. Fromuz eo bet deom klevet buez ar barz labourer Loeiz Herrieu. Eul labourer eo bet e gwirionez : labour douar ha labour spered eo bet e ziou dachenn labour ken frank an eil hag eben. Eun dén a feiz kreñv ouspenn. Eun tad a familh niveruz. « *Dasson ur galon* » a jomo e oberenn veur. El levr-se e kavom Loeiz Herrieu penn da benn : al labourer douar, ar barz, ar skrivanier, ar Breizad, ar hristen...



Da ziw eur hanter emañ an D^r *Dujardin* en e gador brezeg. Warlene enoa c'hwitet war e daol, klañvet ma oa eun nebeud amzer a-raog. Ar hleñved, avad, a zo eet diwar e dro. N'eo ket souezuz, medisin eo !

Morse n'on-eus kavet an D^r *Dujardin* na ken yaouank, na ken dibistig. Ar brud e-neus da gaoud eur bluenn lemm. E deod a zo ken lemm all. E-pad eun eur, — ha muioc'h e vije bet chomet, ma vije bet lezet, — e tiskouez deom pegen braz burzud eo e vije c'hoaz beo ar brezoneg. Buez kalet a reer dezañ euz an diavêz hag euz an diabarz abaoe n'ouzon ket pegeid. Gwechall, na rouaned Breiz, nag on duked zokén, ne zebtantont ket beza bet greet nemeur a dra evid e zerhel beo. Gouarnamañchou Bro-Hall, a zo bet gwasoc'h c'hoaz, evel-just. Ar Vretoned o-unan, end-eeun, a zo bet bugale dinatur aliez evid yez o havell. Pa vez unan ouz e zivenn, e kaver dég d'hen tamall ha d'hen diskar. Ha pa weler unvaniez o sevel, e teu unan benenag atao da lakaad freuz... Mad ! daoust da-ze, beo eo c'hoaz ar brezoneg. Nerz a zo ennañ zokén, pa 'z eo deuet a-benn da voda amañ kemend-all a vistri-skol. Tamm ha tamm e kemer e blas er skoliou, hag ar chañs on-eus hirio da gaoud en or penn, da ziskouez-deom an hent sura, an Ao. Chaloni Falc'hun, kelenner er Skol-Veur... Heti a ran, eme an D^r *Dujardin*, e vefe dorn ouz dorn ganeom, an oll Vretoned a volentez vad. Pebez labour kaer ne rafem ket neuze !...

Mond a raim d'e heul, goude, da weled diskouezadeg ar yez. Pignet en e zav war eun daol, e displeg deom talvoudegez al levriou a zo eno, e-pad tost da eun eur adarre.

An diskouezadeg, bet digor e-pad an hañv penn da benn, he-deus nevez klozet he doriou, goude beza bet gwelet, gand ouspenn 15.000 a dud.



Da 6 eur 30, eh en em gavom e sall vraz ar Skolaj, evid klevet an Ao. L'Helgouach euz ar C.N.R.S.

An Aotrou 'n *Eskob Fauvel* a ra deom an enor braz da zond da zelaou ar brezegenn-se, evid diskouez an interest e-neus evid al labour a reom. Ra vezo amañ trugareket.

Da heul ar prezeger, ez aim don-don, en amzer dremenet, keid ha ma hell ar skian kas spered an dén, da glask ar roudou pella euz ar vuez. Diskouez a raio deom goude, dre luhskeudennou-tan, an testou a zo bet kavet euz an amzeriou koz-se, priachou, mein benet hag a bep seurt...



A-raog mond da gousked e klevim c'hoaz *Bernard de Parades*, « *Délégué au Tourisme* » evid ar Finist' er.

Displega 'ra eun danvez hag a ya dezañ : Penaoz lakaad ar vugale da dañva kaerderiou or Breiz : korniou-bro, savaduriou, hengouniou istor hag kement 'zo... Penaoz ive ober dezo kared kement-se. Penaoz lakaad anezo da gaoud c'hoant da zizelei ar pez a zo kaer en argoad hag en arvo-

riou or bro. Ra vezo or bugale, da vihanna ken desket hag an douristed war ar pez a welont en-dro dezo. Diskouez a reas c'hoaz, penaoz lakaad eur bourmenadenn skol da veza plijaduruz ha kenteliuz, en eur zisplega d'ar vugale, a-raog loh, istor ha talvoudegez ar pez a welint.



Trede devez.

Ar *Frer Cyrille-Léon*, eo a zo e dro da zigeri an devez diweza.

Rei a ra da beb hini, heb a levr « *Geotenn ar Werhez* ». Ha setu ni o kemer plas or bugale-skol.

— Digorit ho levr, emezañ, er bajenn 23. Lenn a ran ar bajennad-se. Heuilhit mad hoh-unan.

Hag ar mestr a lennas ar bajennad en eur zistaga mad pep gér.

— Breur Korantin, lennit c'hwí bremañ.

Hag ar breur Korantin da lenn.

— Aotrou Cormerais, kendalhit.

An Ao. Cormerais a lennas mad.

— Deoh-c'hwí bremañ, frer Uguen...

Hag evel-se, beteg ma oe lennet diou pe deir gwech ar bajennad. E-keid-se, ar vugale a zo bet fur hag a heuilh mad-dreist.

Goude al lennadenn, e kemerer ar frazennoù an eil goude eben. Ar geriou diéz a vez skrivet war an daolenn-zu ha laket geriou ésoh dirazo. A-wechou geriou galleg...

Pa vo fin d'ar gentel an oll o-deus keuz, ken plijuz ha ken kenteliuz e oa ! !



Skedusa ha donna prezegenn a glevim e-doug ar skol-hañv, a vo moarvad, hini an Aotrou *Guilcher* euz ar C.N.R.S. komz a raio euz an danvez-mañ : « *Cultures ethniques et Culture universelle* ». Oll binvidigeziou ar Béd a zo e dalh an dén. Da hemañ d'o zuna ha d'o mera hervez e spered ha spered e vro, pe e gorn bro. Penaoz e hell, eur vro vihan kaout he « *Hultur* » dezi he-unan ? Dezi da brederia, ha da weled petra 'zo galluz. Ra lezo da goueza ar pez a zo didalvez pe dihalluz evid ar mare-mañ. P'he devo dibabet, ra labouro gand kalz a urz hag a bennegez, beteg tizoud ar pal, med, he daoulagad hag he spered bepréd digor war an diavêz evid tenna he mad euz ar pez a zo el leh all, er broiou all. Derhel da herez on Tadou, med heb ober fae war ar re all na mankoude e garantez en o heñver...

Selaou an Ao. *Guilcher* a zo eun drugar. Daoust d'an hanter devez beza bet leun, dén ne houlenne paouez. Ken talvouduz e oe kavet e brezegenn, ma oe goulennet digantañ mond d'ar hloerdi d'he lavared ive d'ar veleien chomet eno goude o retred.



Goude préd lein, beh adarre d'al labour. An Tad *Laurent-Gougay* euz Kervénead a zo euz or gortoz : « *La rythmique bretonne dans les chants populaires* » eo danvez e gaozeadenn. Maout eo an Tad war ar vicher. Da ziwall a zo, pa zaver toniou breizeg, pe kanaouennou, euz taol mouez ar yéz. Kemer skwér war ar hanou latin. Heulia ive kanaouennou, kantikou koz a zo. An Ao. Cong, Paotr Treoure, a jom, war an dachenn-se, unan euz ar re wella. Diwall ive, da lakaad bepréd ar pouez-mouez da goueza war notenn greñv ar muzik. Kement-se a ro toniou pouner a lop en eun doare skuzuz ha kasatiz. An tad e-neus savet, da skwér, toniou war barzonegou da Reunan ar Moug, hag o han deom...

Réd eo paouez. Anéz on-nefe kared klevet an Tad o kana or haerra kantikou, deom-ni da zeski penaoz o hana d'ar vugale



Kerkent warlerh, e tistroom da zal vraz ar hoariva. Eno ema ar frer *Le Bail*, « pro Directeur al Likès », ezel euz ar « Société Géologique de France » hag hirio, unan euz ar re zesket, e Breiz, war an danvez-se.

Ar frer *Le Bail* a gomz deom euz an « uraniom » e Breiz. Evel a welit, ne fell ket deom, er Bleun-Brug, beza tud diwarlerh.

Breiz, emezañ, a zo pinvidig a-walh en « uraniom ». Bez ez eus dija mengleuziou war-dro Lignol; war-dro Lesneven (Plouider) ha Brest (Gwiler) ez eus ive uraniom. Hemañ eo nerz mekanikel an amzer da zond. Ar glaou a zo erru berr. An « esañs » kennebeud ne bado ket atao. Eur hilo uraniom, a zo gantañ kement a nerz ha teir mil donellad glaou. Beteg-henn on-eus kavet e Breiz, deg leh, gouest da rei uraniom. Nebeud a dud, evid c'hoaz, a vev, e Breiz, euz an uraniom: 200 hepken. Méd uzinou a vo da zevel evid digemeska an uraniom diouz ar vein pe an douar. Plas unan anezo a vefe war-dro an Oriant.

Ar frer *Le Bail* a ziskouez deom neuze, mein uraniom, ponner evel plom. En deñvalijenn e skedont evel tan glaz, kaer kenañ. Pep hini a hell klevet sklakerezh ar bont « geiger » implijet evid dizelei an uraniom.

Setu eur gentel hag a zo bet plijuz ha kenteluz!

Da 6 eur ha kart on-nevezo eur gerseenn. An ao. Henri Queffelec, gloazet war aot Sant-Pabu, n'hell ket dond. An ao. Falc'hun, eur wech muioh, a gemero e blas, hag an oll a zo laouen.

Gand luhskeudennou-tan (projection) e raim d'e heul eur bourmenadenn gaer, da studia ar rann-yezou a gaver e Breiz-Izel. Gweled gerioù brezoneg o redek war eur gartenn hag o cheñch furn euz eul leh d'egile a zo, e gwirionez, kenteluz-kenañ ha plijaduruz. Netra gwelloc'h da rei da gompren ar rann-yezou hag ar gerentiezh tost a zo kenetrezo. Ouspenn tri-ugent kartenn skeduz a dremenaz evel-se, dirag on daou-lagad.

Da geñver pred-lein, Visant Seite ha Korantin Riou o-deus lavaret eur ger a drugarez d'ar re oll o deus sikouret kas da vad skol-hañv al Likès. Ha da genta da Renner al Likès ar frer Eujen, hag an iz-rener ar frer Cyprien-Joseph, bet ken mad ouzom e-dug an tri devez frouezuz-mañ.

Ouspenn trugarekaad ar brezegegerien meneget uhelloc'h, V. Seité a lavaras ive eur bennoz Doue da Yves Le Louz a gasas ken mad en-dro aferioù materiel ar Skol-hañv.

Eñ ive, en em gargas da werza levrioù brezoneg, ha dond a reas a-benn da gavoud eun tamm brao a brenerien.

Prezegenn ziweza ar Skol-hañv, a oe greet gand Jos an Doare euz Kastellin, diwar-benn ar hizellèrèz breizeg. Eur mailh eo Jos war an danvez-mañ.

...« Mar fell deoh, eme Jos gouzoud petra eo ar hizellèrèz breizeg, n'it ket d'her hlask er hêrioù. It avad, war ar mêz. Eno, er halvarioù, er chapelioù bihan kuzet, c'hwil a gavo gwir berlezennoù or skultèrèz breizeg »...

Goude eur brezegenn a dri hard eur, gand harp skeudennou euz ar re gaerra, e rejom eur bourmenadenn dudiuz dre Vreiz-Izel. Trenen a reas dirazom feunteunioù, kreazioù, chapelioù, ilizoù, tourioù, karne-lioù... Peadra d'on lakaad da dridal ha da rei deom lorch ha veza ganet en eur vro a zo enni kement a gaerderioù.

D'ar gwener vintin, a-raog an disparti, e oe lavaret an overenn evid an Aotrou Perrot, an D^r Liberal hag Erwan ar Moal Doue r' o 'fardono, gand an Aotrou Chaloni Falc'hun.

E-pad an overenn-se, e oa kanet ive « *Pedenn Veur ar Pab Gelas* » war eun ton nevez savet eviti, gand an Aotrou Kerrien kure en iliz-veur Kemper.

Kenavo da vloaz, marteze en eun tu bennag e Bro-Wened.

Y. M.

kanvou

Rekomandi a reom da bedennou mad on lennerien ene an aotrou LOUIS LE MINOR, euz Pont'n-Abad, nevez galvet gand Doue. Bezieth eo bet e Pont'n-Abad d'an 22 a viz Du, e-kreiz eun engroez vraz a vignoned. Tad eo d'or mignon mad Yann ar Minor, iz-rener Bleun-Brug Kerne. Ra vezo an Aotrou Doue, Intron Varia Garmez hag oll zent Breiz, laouen braz ouz e ene.


Plijet gand an Intron ar Minor, he bugale, he bugale-gaer hag he bugale vihan, digemer gourhemennou a gañv ar Bleun-Brug.

Prezegennou ar Skol-hañv a vo moulet e « *Les Cahiers du Bleun-Brug* ». Evid o haoud, skriva da : Jean Cormerais, Professeur au Lycée de garçons, Rennes. C.C.P. 17-60 Rennes.


Abonnement aux Cahiers (trimestriels) : 200 francs.

Bale Gwazed Harleh


(Martial)



1. Gwa-zed Har-leh na gle-vit két Tud a va-gad o tond d'ar red
Trouz ar zao-zon eo o va-le, Dond a reont war-nom heb da-le,




'Vel gwa-gen-nou mor di-rol let O lam-mad 'beb tu.
Dis-pak gan-to dir o hle-ze, War-no koun-nar ru.



Mal-loz d'ar zao-zon fall ! Ka-som-i d'ar bed all ! Pao-tred sail-hom



di-dru-ez heb da-man. Ni d'or bu-hez ! 'Vit or bro eo e stourmom or



bu-hez de-zi a gin-ni-gom Dinam, di-neh hor penn u-hel Ni var-vo fi. del !

1. Gwazed Harleh, na glevit két,
Tud a vagad o tond d'ar réd,
'Vel gwagennou mor dirollet,
O lamimad 'bep tu ?
Trouz ar Zaozon eo, o vale ;
Dispak ganto dir o hleze,
Warno kounar ru.

Diskan.

Malloz d'ar Zaozon fall !
Kasom-i d'ar bed all !
Paotred, sailhom didruez,
Heb damanti d'or buhez !
'Vit or Bro eo e stourmom,
Or buhez dezi a ginnigom,
Dinamm, dineh, or penn uhel,
Ni 'varvo fidel.

2. Luhed a darz er hlezeier,
Kén e skéd ganto ar reier ;
Ruzia 'ra dour ar prajeier.
Stourmom beteg penn !
Flastrom kalet an enebour,
Falhom dizamant an treitour,
Kén redo e wad evel dour.
Trehom penn-da-benn !

Diskan.

'Vit or Bro e tourmom !
'Vit or Bro e varvom !
Divenn 'reom on tud karet :
Priéd, bugale, Mignoned.
Gwazed Harleh, da heul or banniel,
War-raog bepréd, kaloneg, fidel !
Biken dén ne gilo
Kentoh ni 'varvo !

(Diwar ar Hembraeg gand V. S.)

Eur ganaouenn vrezel eo houmañ, savet ha kanet gand or breudeur Tramor en o stourm a-eneb ar zaozon. Laket eo bet ar zom-mañ war disk « microsillon » gand *Kanerien Landi*. Goulennit an disk-se, gand eur haier kaer ouz e heul, warnañ daouzeg kanaouenn : 1. *Klemmigan* (kan Skoseg) — 2. *Ar Reder-mor* (Skoseg) — 3. *Ar Rozenn ruz* (Skoseg) — 4. *Eren* (Iwerzoneg) — 5. *Gwazed Harleh* (Kembraeg) — 6. *Dalch soñj* (Kemb.) — 7. *An tri Angelus* (Kemb.) — 8. *A-héd an noz* (Kemb.) — 9. *Ar Rozenn* (Iwerzoneg). — 10. *Son Londonderry* (Iwerz.) — 11. *Yannig va Mignon* (Skoseg) — 12. *Ar Barz yaouank* (Iwerz.). — Skriva da : Abbé Abjean, vicaire, Landivisiau (Fin.).

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

skol - hanv ar bleun-brug e 1957



Ar gelennerien gristen e skol-hañv ar Bleun-Brug el Likès, Kemper.

An hini a garan

Diwar ar Gwenedeg gand **R. Abjean.**



An hi-ni a ga- ran, gwe-chall, bi-han er ger, Pa oam tostig an
eil, an eil ouz e-gi-le, va ha-lon ne ga-re, ga-re ne-
med u-nan ; pa oan bi-han er ger, an hi-ni a ga- ran.

An hini a garan, gwechall, bihan er gêr,
Pa oam tostig an eil, an eil ouz egile,
Va halon ne gare, gare nemed unan ;
Pa oan bihan er gêr, an hini a garan.

An hini a garan, eun deiz 'n-eus va losket ;
Eet eo d'ar broiou pell, d'eur vro n'anyezan ket.
Eet eo d'ar broiou pell da hounid e vara ;
Kollet, kollet eun deiz, an hini a garan.

An hini a garan, 'meus kollet da viken,
Ema digouezet pell ha ne zizroio ken.
Ha setu ma kanan, kanan keti ketañ,
Ha setu ma kanan d'an hini a garan.

Mar fell deoh klevet ar zon dudiuz-mañ, goulennit digand an Ao. Abjean an disk « microsillon 33 t. v. 6689 » a zo warnañ war eun tu : 1. *Salud Breiziz* — 2. *Paotred Rosko* — 3. *Ar Pillhaouer*. — 4. *An hini a garan*. — 5. *Tuchant e arrio an hañv*. — 6. *Spered an tan*. — War an tu all : 1. *Pedenn diouz ar mintin*. — 2. *Mari or Mamm garantezuz*. — 3. *Ni ho salud o leun a hras*. — 4. *Piou 'lavaro pebez glahar*. — 5. *Gouelit, va daoulagad*. — 6. *Lavarom or chapeled*. — Da heul an disk e resevoh eur halerig, warnañ komzou ar hanaouennou-mañ.

Skriva da : Abbé Abjean, vicatre à Landivisiau, Finistère.